

WAR ZAO BRETONED

pe

SON AN EVERIEN GWAD

(War don « Ker-Is »)

I

Didostit ol 'ta Bretoned,
Didostit oll evid kleved,
'Vid kleved kan' eur ganaouenn
Savet e parrez Poullaouen.

II

Savet gand eur peizant dister
Hag a zo c'hoaz 'barz ar vizer,
Zo bremañ c'hoaz en dienez,
Paotred Pariz zo didruez.

III

Gouzoud a rit ema Debré
O frikota en Elizé
Keit 'ma labourerien douar
Amañ er chagrin, er glahar.

IV

Ma teu eun deiz d'ober 'n droiad
Beteg Penn-ar-Bed war e droad,
Ni a c'hweo dezañ e fri,
Ha brao c'hoaz gand eun torch-listri.

V

Lakêt 'neus derhel er prizon
Daou zen dispont, daou wir Vreton,
Ar Gourvenneg hag al Leon
A zivenne Breiz gand kalon.

VI

Goude oa gwel't e Montroulez
Eur mor a dud ' ziw ar mêz
Gand eul louarn war beg eur vaz,
Ha Debré oa anveet c'hoaz.

VII

Gwel't '-moa ivez 'barz kêr Garez
Ar blasenn leun a C.R.S.
Gand grenadou lakrimojen
Leiz n'ouzon ket ped muzetenn.

VIII

Ganeom labourerien douar
Eur banne chistr hag eun tamm bar'
O tebri war vord an hentchou
Heb ober nemeur dizurzou.

IX

O ni amañ e Breiz-Izel
N'om ket mad 'med d'ober brezel,
Daou hant daou ugent mil a zo
Duze kousket er frontiero.

X

Bretoned mad ha kaloneg
Kousket 'baoue 'r bloaz pevarzeg,
Ha kemend-all oa deut d'ar gêr
Gloazet pe maro potriner.

XI

Na pegen trist d'eur vamm, d'eun tad
Kaoud eur hrouadur savet mad
Red dezañ mond da vrezeli
Duze trezeg an Aljeri.

XII

Setu aze 'ta va zud vad
Ema son an everien gwad,
Gweled a reom-ni oll bremen
Pehini eo ar blanedenn.

XIII

War zao ! War zao ! 'ta Bretoned,
Rag an eur hirio zo sonet,
War zao ! War zao ! Da virviken
Evid terri ar blanedenn.

XIV

Mar klaskit piou zav ar homzou,
Eur peizant eo kreiz e boaniou
A zav e zoniou goude koan,
Anvet eo AR PICHON BIHAN.